

CHANSON NEVEZ

COMPOSET GANT EUN DEN YAOUANC

EUS BARES ELLIANT EN ENOR DE VESTRES

VAR TON AR SERGEANT-MAJOR

Premier Couplet

Me o ped compagnunès, disdostait da glevet,
Me ia da gana eur zon, so nevez composet,
So gret gant eun den yaouanc, demeus ar bares-ma
Evit en em amusi, ha n'em zivertissa.

2^e Couplet

En eur veva var an douar, joaius ha triomphant,
Meus gret eur zon d'am mestres ha dime ma c'hunan,
Pa zeo guir e zeomp-ni deut, da n'em garout hon daou,
Gredon quiet e errufé, disparti etrezomp.

3^e Couplet

Me a so eun den yaouanc, eus bares Elliant,
Hag en beuz em bues met chagrin, ha tourmant,
E mo choazet vit mestres, eur c'hapla maoues
Hac eur vrava plac'h yaouanc, e ao bars ar bares.

4^e Couplet

Darampredet meus déjà, cals a verc'het yaouanc,
Couls ar bareziou all, evel ar bares-man,
Hac em eus quiet bet gulet, dirac ma daoulagad
Evel dezi quen joaius, eun aër quen agréabl.

5^e Couplet

Caret zei tro var dro, gant ar botret yaouanc,
Couls ha gant ar vras, vel gant re vian,
Estimet zei en è fares dreist tout an oll verc'het
Balamour de c'homportant, è furnes hac guenet.

6^e Couplet

Estimet quer d'ar boquet roz,

16^e Couplet

Setu me soudart yaouanc me reinque querzet
Vit mont dober ma zervic' betec guer à Vuenet,
En eis varnuguen d'artilleri oa ret din servicha,
Ha lesen ma mestres bars ar guer da oela.

17^e Couplet

Epad dec mis anter son bet en armio,
Aliès a vech emeus recevet hè c'helo,
Eus pere e mise cals a gonfortamant,
O sonjal ma mestresic, ma c'harantes ardant.

18^e Couplet

Mes lesomp ol quemensé breman eo finisset,
Laromp adieu vit pemp bloas dar garnison Guenet,
Ha ma ne zavoquet revolt enep dar Francisen,
Me zistroo adare pad eis de varnuguen.

19^e Couplet

Evit besa exercet dre ar gommandant,
Eus a bers ar republiq' hac ar c'houarnamant,
D'exerci hè soudardet da zouguen an armou
Vit besa cre a fermoc'h da vont dar c'homb'jou,

20^e Couplet

An dregon a vis guengolo e oant bet desarmet
E bars ar guer a Vuenet vit ma bro beniguet,
Epad ma oant bars an hent e sonjen alies
E ma douc, ma c'harantez Channic ma mignonès.

21^e Couplet

Ar guenta antretie mo bet ganti goudè,
E oa da hardon ar bosera an c'houarnamant
E oa da hardon ar bosera an c'houarnamant

Quen ru e zeï peintet, evel d'ar boquet roz,
E dent reinquet en è fen, è muzellou quen clos
Vit quemense e c'haran, ne deus den vit compren,
Ma vemp hon daou unisset, ne c'houlin netra quen.

7° Couplet

Ar c'henta mor bet biscoas, remarquet an nezi,
Oa var tachen bourc'h Elliant, da bardon St-Gili,
Eno pa moë guelet, me dosteas outi
Vit gallout caouet ar voyen, da goseal ganti.

8° Couplet

Mes epad ouspen eun heur, e oan bet o fala,
Hep moe bet desi, gallet laret netra,
Commencet oant da gredi, oant col ma amzer,
Oa guelloc'h din troë ma c'heing, ha dont eon dar guer.

9° Couplet

Mes pa mefe sonjet cren, dont da ober eun dra,
Mar laquont ma foan de ober, sur vankont quet ganta,
Pa oa deut an abardae, echu ar gousperou,
Abars n'em zistroë dar guer, oamp n'emgavet hon daou.

10° Couplet

Ha setu ni so c'hantre bars an hostaleri
Da guemer bep a vannac'h vit n'em antreteni,
Eno e nemp gret or fromessou,
Assuret n'eil d'eguile visomp bet priejou.

11° Couplet

Enem c'heulla, réomp goude an oll assambleo,
Ar foariou, ar pardonniou partout ol dre ar vro,
Tre betec oant deut an oad da denna ar billet,
Hor c'halonou quen tener a oa quasi rannet.

12° Couplet

O sonjal e oa ret domp n'em separi hon daou
Vit mont da c'heuil ar soudardet pere so en armou,
En eur bignet bars ar gamp an deis se vit tenna,
Commanç ma goad da vervi, ma isili da grena.

13° Couplet

O sonjal e mise bet eun numero izel,
Delezen pad pevar bloas ma mestresic fidel,
An hini e meo choazet vit ma muia caret,
Ya dreist quemem plac'h yaouanc em eus darempredet.

14° Couplet

Mes a drugarez Doue, è mo bet ar bonheur
Da gaouet eun numero mad ma c'honge e oa ber.
Neuse tistroen dar guer joaius ha triomphant,
Da c'hortos gout an devez da vont d'am regimant.

15° Couplet

Bars ar blaves mil eis cant eun ha pevar uguen,
Oant quemeret da zoudart er guer a Rosporden,
Neuse ma reinquet quitad dious ma sad ha ma mam,
Vit serviç ar Republiq hag ar c'houarnamant.

E oa da bardon ar... ar sul guenta a here,
E var dachen bourc'h Elliant me mo è remarquet
Gant ar merc'het yaouanc all he c'hamaradezet.

22° Couplet

Ha setu me ta neuse o tremen ebiou dezi,
Me tenna ma soq em dorn evit è zaludi,
Debonjour d'oc'h plac'h yaouanc ma douçic coant Channic
Me a reint d'oc'h ar salud dreist tout an ol verc'het.

23° Couplet

Ha d'oc'h ive den yaouanc pa zoc'h ma zervicher,
Damp da glasq bep a vannac'h pa zoc'h degouet er guer,
Ar pennadec amzer so deja tremenet
Abaoue ne neussomp quet enem zarampredet.

24° Couplet

Setu ni o c'hantren neuse bars ar c'hafe,
Eleac'h ma zomp chommet betec an abardae,
Eno e nomp discleriet an eil da èguile
Ar c'hoant da n'em assamble, da dremen hor bue.

25° Couplet

Rac se ta ma zervicher me o ped da zonnet
Da c'houlen conge ma sad vit ma vemp unisset,
Evel ma e meus clewet an nésan o parlant,
Me a sonj din d'am c'hreden penos e ma contant.

26° Couplet

Hac e vefomp unisset an eil gant èguile
Evel ma oa guechal Urie ha Bethsabée,
Ni a vo hon daou contant, certain me ho assur,
Hag a raio domp-ni beva en or plujadur.

27° Couplet

An eil sul a vis querzu goude or debret merren,
An amzer a oa quen scler mè o font da bourmen
Tre betec ty ma mestres expres vit e guelet,
Da c'houlen digant è sad pez oa en o speret.

28° Couplet

En eur antreal an ti me a velas deus-tu
Ar fouet gant en e zorn, hac scoe an daou du
Var è verc'hedigou quez an eil goude eben,
Dre ma oant tammic dic'hueat o tont deus an oferen.

29° Couplet

Hac o c'huelet quemense me oa sabatuet,
Ne ouient pelec'h terc'hel vit mont da nem guet,
Ha me o chom eun tammic è quichen toul an or,
A quen ma oa douceet désan tremenet he fulor.

30° Couplet

Pa oa achuet an trous evit ar verc'h quenta,
E oant bet pedet ganta da vont tre da doma,
Cetu me ta neuse gant eun aër quer contan
O font tre d'azeza e quichennic an tan.

31° Couplet

Pa oant bet eno eur penad me zistroe dar guer,
Mes ret oa din discleria scleraman ma affer :
Assa ma c'henter Jerôm dont on espès aman
Da c'houl ganoc'h ho merc'h Channic ya ma e moc'h contan.

32° Couplet

Cetu heon ta neuse a stoueas è ben
Evit gallout raï dime respont eus ma goulen,
Evel an den re crepul ne deus ambaras,
Hac è respontas dime ractal e creis ma faç.

33° Couplet

Gant è gomzou direspect e zellou malicius,
Birviquen po ma c'honge d'unissan assambles,
Ma arc'hant so evidon ne dint quet evidoc'h,
Mar vint quet vit ho dispign, me ho sollo d'ar morc'h.

34° Couplet

Setu ta camaradet ar respont neus gret din,
Tapet eo ganin ma zac'h, gant eur gomzic hepquen,
Setu me o troe ma c'heign hac o tont a c'hane,
An dour em daoulagad var ma diou chod a rede.

35° Couplet

Pa velan e oant forçet da guitad ma mestres,
Emeus breman nec'hamant chagrin, trididiguès,
Na pa jonjfen em bues betes an oad a gant vloa
O nan certen birviquen ancouein quemmen-ma.

36° Couplet

Quenavo ta Channic paour mont a raon d'ho quitad,
Me gare vizac'h quet bet dirac ma daoulagad,
Pise quet bet gret dime quemmen-ma a c'hlahar,
Guel oa din beut dec vlas e calon an douar.

37° Couplet

Passeet eo ma rejouissanc alas ! var ar bed-ma,
Ha brema na raon bemdes nemet enem jala,
Ato o scuila daëlo baoue homp separet,
Mes petra zevichou din pa zin daëlou collet.

38° Couplet

Alies gueic'h on bet ouet da vel an nezi,
Collet e meus ma amzer, ma féamant ive,
Pa zoa hi e mo choazet vit beza ma fried,
Enni a oa ma fianç dreist tout an oll verc'het.

39° Couplet

An despet tout de guemense naonquet de decrial
Gouscoude è zeï sujet tout dan ol dechou fal,
Car bep sul ha bep gouel roc mont dar gouspirou,
E maï accustomet da eva bannigou.

40° Couplet

Neuse ouспен se ta gant e feneant,
Var zigare dont a meas hi reas an tis,
Mes me gonto ato na ma guir ma c'homzou

48° Couplet

Bep mare eus sizun e tegoueas ar gommer
Gant he bordelen hir han he boudriou ber,
Gant quemmen al a bres a vral he c'hotillen,
Hac a ia bajou bras da vel he c'homperrien.

49° Couplet

Debonjour d'oc'h c'homper, setu me erruet,
Var zigare pourmen me so deut d'ho cuelet
Pa meus caët eun tam amzer herves ma faltasi,
Meus sonjet donnet girio expres d'ho regali.

50° Couplet

Ar c'homper oc'h e guelet oa quen drant he lagad,
Ha lar dezan e c'hunan souden mo dra benac,
Avancet ta ma c'hommer deut trè da azeza,
Setu eur gador ase quit veac'h da chom n'ho saou.

51° Couplet

Neuse vo tapet ar vannel da ober tro an ti,
Torchet mad an tolliou ha scubet ar lorzi,
Hac ar baëlen dilostet laquet var an treber
Evit frita crampouz, regali ar gommer.

52° Couplet

Ar gommer en he c'hador, a zel an dro desi
Evit gout piou a veso neuse var dro an ti,
Aroc commanç discleria ol fotou ar real,
Rac eviti he c'hunan neus netra da damal.

53° Couplet

Malheur evit piou benac voquet ganti caret,
Hennes vo a doliou teod sur oalc'h dispennet,
Pe veac'h den a galité eun den mad ha den fur,
Ebars plaç ho ponheur lag an displujadur.

54° Couplet

Gouscoude, ma car sonjal en è barn deveza,
Lesfe an dud tranquil er bed-ma da veva,
Lennet meus ar levriou e meus guelet merquet,
An ifern a so carguet a deotou miliguet.

55° Couplet

Peguen scrijus vo an de, devez ar jujamant,
Par reinco ar goal deotou disquen e creis an tan.
Vit reço ar recompanç demeus ho labourio,
E zafen tout assemblez dan ifern da domo.

56° Couplet

Assa ta camaradet breman me achuso,
Rac oalc'h e meus contet d'oc'h var sujet ar goal deoto
Martrese, vo cavet lod c'hinsulti an c'hanon,
O tont da rèpech din mo goal gomzet outo.

57° Couplet

Meu da c'hini martrese vo clet ho lavaret,
An hini en deus gret ar zon-ma eo troublet e speret,
Mes me gonto ato na ma guir ma c'homzou

Neuse ouspen se ta gant e feneal...
Var zigare dont a meas hi reas an ilis,
O pepeus mez ha horrol evit eur plac'h yaouanc,
Mant dober quemen al en ilis bourc'h Elliant.

41° Couplet

Da zeves foar gouel Yan o tont deus a Rosporden,
En devoa c'hoas collet e c'hoef ouspen e c'hotillen
Pa oaï nouse n'em gavet sambles gant Margaëdic,
E teuson dar guer ho diou joupala Perrinic.

42° Couplet

Evit tremen he chagrin, he hirvoud hac annui,
Song quemer Jampic Pouldu vit enem amusi,
Gout a oalc'h a raon déjà mant ho daou priejou
Partout leac'h a valeon e glevont ho c'hojou.

43° Couplet

Tre Pouldu hac an Guerscao neus gret eur vinojen
O c'hont bep sul ha bep gouel da c'huel hé introen,
Mar gaf quet hir oalc'h an de, e choma da loja,
Gret en devezs bet dezi meurt da nosvez deja.

44° Couplet

Neuse antronos vintin e zavo mintin mad,
Quen joaius ha quen contant o c'hont da labourat,
Ha lar dezan e c'hunan sur oar quet den e bet
Ezon bet gant Channic an nos man ho cousquet.

45° Couplet

Vit an drase, camaradet, faut quet beza fachet,
Brao eo guel an dud yaouanc o tont da nem garet,
Lezomp ol ar jalousi, greomp hon amitie,
Plujadur vras e noufomp an eil gant èguilé.

46° Couplet

Ni so bet ive pel amzer hon daou an union,
Mes ar goal deod so bet caus d'hor zeparation,
Car bemdes e tegoueas na vanque de ebet
Gant e guentillou mad ato var ma sujet.

47° Couplet

Breman neur finissa, meus c'hoant da lavaret
Eun neubeudic comzou a so deut em speret,
Dar parlantourien guer hanvet ar goal deotou,
C'huelon bemdes fala, oc'h ober tro an henchou.

57° couplet

Meur da c'hini martrese vo clet ho lavaret,
An hini en deus gret ar zon-ma eo troublet e speret,
Mes me gonto ato pa ma guir ma c'homzou
En eur gontinui ma zon ne larin quet a c'haou.

58° Couplet

Evel ma em beus bet clevet conchennou an de d'coz,
Eo diessoc'h dimesi vit mont d'ar barados,
Ar viriones da glevet so ivez cassaius
Dar re a nem gaf coupabl sur mant da veut cabus.

59° Couplet

Assa eta ma mestres mar blij quet ho son d'oc'h,
C'hui gomposo din eun al martrese vo bravoc'h,
Car gouzout a raon deja e zoc'h leun a speret
Eus ar lignès honorabl ha memes estimet.

60° Couplet

Evit expliqua ma oad ne larin netra quen,
Emeus breman tric'hant mis hac eis a daou uguen
Pe nao blas var nuguen ha dec devezs ouspen,
Evit laret scleramant raï dan ol da goupren.

61° Couplet

Epad nao blas varnuguen ezon bet en Elliant,
O chom e ... (1) gant va sad, gant va mam.
Mes breman e meus sonjet tremen va yaouanquis
E gard ar republicain bars ar guer a Paris.

62° Couplet

Eno me vevo contant, quen tranquil ma speret,
Mar a blijo gant Doue ma lezel em yec'het
Pa meus reinquet lesel ma mestresic Channic,
Graç domp da nem velet e bro ar joaustet.

FIN

CHAMPIC GARVER

(Tout droit réservé)

(1) Da lavaret eo ar guer ho peus c'hoant.